

SONNENNEU

SONNEN HÉLEN <sup>(1)</sup>

*Allegretto.* Mét. ♩ = 104.

Er verh :

*mj*

Mar fal d'oh hui men di - mé - ein, Ur

Er vam :

*P*

bou-lan-jér 'gon-zet ket d'ein Pe - rak en - ta, Hé-len,

*pp rall.*

Pe - rak en - ta me merh, Pe-rak en - ta ?

*Er verh :*

Mar fal d'oh hui men diméein,  
Ur boulanjér 'gonzet ket d'ein.

*Er vam :*

Perak enta, Hélen,  
Perak enta, me merh,  
Perak enta ?

*Er verh :*

Ur boulanjér e foet é doéz,  
Me foetehé mé just ken és !

*Er vam :*

Guir e laret, Hélen,  
Guir e laret, me merh,  
Guir e laret !

Mar fal d'oh hui men diméein,  
Ag ur bosér 'gonzet ket d'ein ;  
(*Er vam* : Perak enta. ) (2)

Ur bosér zou kri a galon ;  
P'em hemérehé léh ur lon ?  
(*Er vam* : Guir e laret... ) (2)

Mar fal d'oh hui men diméein,  
Un tavarnour 'gonzet ket d'ein ;

Un tavarnour, get é ivaj,  
Me lakehé ré de filaj.

Mar fal d'oh hui men diméein,  
Ur menuzér 'gonzet ket d'ein ;

Er menuzér get é venuiér,  
E gas safar é peb amzér.

(1) Er soñnen-men e zou tennet ag el livr : *Méodies bretonnes, recueillies par l'abbé Guillermin et Loëz Herrieu.* 8 real er pèh, dré er post, é ti David, marhadour muzik é Kimpér.

(2) Sel gueh er memes tra.

Mar fal d'oh hui men diméein,    En toér ar en toenneu,  
 Ur masonér 'gonzet ket d'ein ;    E riskl a dorein é vanpreu.  
 Ur masonér a gér de gér,    Mar fal d'oh hui men diméein,  
 Vè 'foetein pri doh er vangoér.    A bautr ur go 'gonzet ket d'ein ;  
 Mar fal d'oh hui men diméein,    Mab er go du doh e vegin  
 Ag ur halùé 'gonzet ket d'ein ;    E zou ken donjerus a vin !  
 Get é vohal vras, er halùé    Mar fal d'oh hui men diméein,  
 Pen d'er ben és me feutehé.    Ur melinér 'gonzet ket d'ein ;  
 Mar fal d'oh hui men diméein,    Er melinér, a di de di,  
 Ur labourér 'gonzet ket d'ein ;    E voéz ne hra nameit dikri !  
 Perpet ér park get labourér,    Mar fal d'oh hui men diméein,  
 Aveit ur voéz poénius michér !    Ur guiadér 'gonzet ket d'ein ;  
 Mar fal d'oh hui men diméein,    Ur guiadér, é peb amzér,  
 Ur hantonér 'gonzet ket d'ein ;    E zou laer bras ha geuiatér.  
 Ur hantonér ar en henteu    Mar fal d'oh hui men diméein,  
 A boén ma houni é dam kreu !    Ag ur héré 'gonzet ket d'ein ;  
 Mar fal d'oh hui men diméein,    Kement kéré e hanañet  
 Ur hemenér 'gonzet ket d'ein ;    Pen d'er ben e zou maheignet !  
 Ur hemenér e zou lorbour,    Mar fal d'oh hui men diméein,  
 Ha nen dé ket dén a inour.    A vab er markiz konzet d'ein !  
 Mar fal d'oh hui men diméein,    Mab er markiz en des argant,  
 Ag un toér 'gonzet ket d'ein ;    Bout moéz dehon me zou koutant.



## UN ÉRED

D'er merh, 24 a viz Imbrill, é ma éredet, en Oriant, hun mignon en E. Iann Lettri, médesinour ha kansort a Vrediah er Varhed a Vreih, get en Damezél F. Er Bozelleg.

Épad en overen éred e hes bet hoariet toñnieu brehoneh ag er ré kaeran.

El lihérieu-ped e oé groeit é brehoneg. Chetu un dra vat azé hag e hra inour d'er prièdeu neùé.

Breihiz de ziméein, héliet er skuir mat-sé.

*Dihunamb* e gas d'en E. ha d'en I. Lettri, é guellan gour-hemenneu a leüiné hag a hir vuhé.